

# ATALIEROÙ e brezhoneg

Ateliers en langue bretonne

Blezad 2023-24 / Saison 2023-24

Tro ar Bed

Le tour  
du Monde

[WWW.TIDOUARALRE.COM](http://WWW.TIDOUARALRE.COM)

ti  
douar  
alrè



# TRO AR BED

Le tour du monde

Ar blez-mañ e kinnigomp deoc'h beajiñ ; ur veaj hag hor c'haso pell, betek penn arall ar bed ! Ni 'dañvo chokola ar Vayaed en Amerika ar C'hreiz ; e Bro Japan e raimp sumotori rak n'hon eus aon rak tra ebet ; en Aostralia e tañsimp àr son an digeridoo ! Ha prest oc'h da loc'hiñ ?

Cette année, nous vous proposons un voyage ; un voyage qui nous mènera jusqu'à l'autre bout du monde ! Nous goûterons le chocolat des Mayas en Amérique centrale ; au Japon, nous nous essaierons au sumotori car nous n'avons peur de rien ; enfin, en Australie, nous danserons au son du didgeridoo ! Prêts à partir ?

## PROGRAMME / PROGRAMM

**1 Lun 23 a viz Gouel Mikael / Lundi 23 octobre :**

Àr roudoù ar Vayaed

Sur les traces des Mayas

**2 Lun 26 a viz C'hwevrer / Lundi 26 février :**

Àr lein ar mane Fuji, troiad e bro ar Sav-heol

Au sommet du mont Fuji, balade au pays du soleil levant

**3 Lun 29 a viz Ebrel / Lundi 29 avril:**

Douar ruz ha kangouroued rouz, àr zouar an Hunvre Meur

Terre rouge et kangourous bruns, sur les terres du Grand Rêve



# ÀR ROUDOÙ AR VAYAED

Sur les traces des Mayas

1

**D'AL LUN 23 A VIZ GOVEL MIKAEL 2023**  
*Lundi 23 octobre 2023*

Ha klevet 'peus komz ag ar Vayaed ? Sur a-walc'h ! Evit kentañ abadenn ar blez 2023-2024 eh aimp davet Amerika ar C'hreisteiz en amzer gevrinus ma oa Pakal, roue meur Mayaat, é ren àr ur rouantelezh ledan e-lec'h m'en em gav kreisteiz Mec'hiko hiniv an deiz.

Labouret 'vo ar pri ha klasket sevel ur pod tres un doue dezhañ ; graet e vo anaoudegezh get doare skritur ar Vayaed ha klasket stummiñ ur « glif » ; tañvaet ' vo a-bep seurt chokola ha klasket o diforc'hiñ mouchet e zaoulagad ha c'hoariet e vo èl-rezon !

Avez-vous déjà entendu parler des Mayas ? Certainement ! Cette année, pour la première journée des ateliers de cette saison 2023-2024, nous irons découvrir l'Amérique centrale au temps mystérieux du roi Pakal, grand roi Maya dont le royaume s'étendait au sud d'un territoire qui est aujourd'hui le Mexique. Au programme, travail de l'argile, réalisation d'un pot à l'effigie d'une divinité de la nature ; découverte de l'esthétique de l'écriture maya et modelage d'un glyphe ; dégustation à l'aveugle de de chocolats et jeux bien-sûr !





# ÀR LEIN AR MANE FUJI

Au sommet du mont Fuji

2

D'AL LWN 26 A VIZ C'HWEVRER 2024


Lundi 26 février 2024

Diàr e gribenn – a-bep tu – e weler douar enezenn vrasañ an enezeneg doc'h en em astenn : Honshu. N'eus ket mar na marse : arru omp e kalon bro Japan !

Un digarez kaer 'vo hon troiad eno da sevel Koinobori ; ar sarpantou-nij stumm ur pesk dezhe. Añseet 'vo ar suminagashi, teknik ar liv àr-neuñv ; c'hwi 'welay, un c'hoari ! Ha get piv e yay ar maout da geñver hor tournamant sumotori ? Evit achu, peogwir n'eo ket ur sac'h goulle evit chom en e sav , a-raok merenn, e klaskimp alejiñ sushi. Na fonnus ar roll-meuzoù !

De son sommet, de toute part, s'étendent les terres de la plus grande île de l'archipel : Honshu. Pas de doute possible, nous sommes bien au cœur du Japon !

Notre voyage au pays du soleil levant sera l'occasion de fabriquer des Koinobori ; les cerfs-volants en forme de poisson. On s'essaiera au suminagashi, la technique de l'encre flottante. Et qui d'entre vous remportera le tournoi de sumotori ? Enfin, pour se donner des forces, avant le déjeuner, atelier sushi. Quel menu !





# DOUAR RUZ HA KANGOUROUED ROUZ

Terre rouge  
et kangourous bruns

3

D'AL LUN 29 A VIZ EBREL 2024

Lundi 22 avril 2024

Setu ni arru àr un enezenn arall – ruz-kraz he douar dezhi – ker bras hag ur c’hevandir ! Aostralia.

Kement ha gouiet hiroc’h a-ziàr hengoun kevrinus an Aborijenez e selaouimp doc’h o istorioù hor c’haso d’un amzer a-raok ma vehe bet anezhi mimp, da gours an Hunvre Meur. Deskiñ a raimp sevel ur vazh-glav ha liviñ loened an enezenn hrezvez doare an Aborijeniz. Alejiñ a raimp « spiders » – un dibenn-pred ag ar re saourusañ !

Nous voici arrivés sur une nouvelle île – à la terre rouge et aride – une île grande comme un continent ! L’Australie.

Nous partirons à la découverte de la mystérieuse culture des Aborigènes ; nous écouterons leur légendes qui nous mèneront au temps des origines, le temps du Grand Rêve. Nous apprendrons à fabriquer des bâtons de pluie, à peindre quelques animaux de l’île à la manière des aborigènes. Nous préparerons un dessert des plus savoureux – des « spiders » !





## ATALIER KANAL / ATELIER CHANT

### MISION KAN AR BOBL

Ho mision, ma asantit he c'has da benn, 'vo deskiñ un ton brezhonek, ar mod d'er c'hinnig hag er c'hanal à leurenn Lokoal-Mendon, e miz Meurzh 2024, da geñver ar C'han-ar-Bobl. Diwal-lit, n'ho po ket 'met teir abadenn evit en ober ! Ne voc'h ket hokunan evit kas da benn ho kefridi : bez' e c'helloc'h kontiñ à ur c'h-coach a-feson, ur ganourez anavet mat er vro, hag a ouiay roiñ deoc'h an c'hoant hag an tu da ziskouez razh ho parregezh : **Morwenn Le Normand**. Dait koustele ha dait e-barzh ar skipailh ! Plijadur 'vo !

**D'ar Meurzh 24 a viz Gouel Mikael ha 27 a viz C'hwevrer,  
D'ar Sadorn 16 a viz Meurzh.**

Votre mission, si vous l'acceptez, sera d'apprendre un chant en breton, de le mettre en scène et de le présenter à Locoal-Mendon en mars 2024, le jour du Kan ar Bobl. Attention vous ne disposerez que de trois séances ! Pour mener à bien votre mission, vous ne serez pas seul.e : vous pourrez compter sur une coach compétente, une chanteuse bien connue ici, qui saura vous donner l'envie et l'espace pour vous exprimer : **Morwenn Le Normand**. Relevez le défi et rejoignez l'équipe !

**Les mardis 24 octobre et 27 février,  
Le samedi 16 mars.**



## TITOUROÙ PLEUSTREK / INFOS PRATIQUES

### AN ATALIEROÙ / LES ATELIERS

Dalc'het e vez an devezhioù atalieroù e sal ar Vadalen (11 ru ar Vadalen), Pleuwigner ; etre 9e30 ha 5e30 g.m.

Les journées d'ateliers ont lieu à la salle de la Madeleine (11 rue de la Madeleine); à Pluvigner ; entre 9h30 et 17h30.

**Priz / Tarif** : 17 € an devezh dre vugel / la journée par enfant

### MISION KAN AR BOBL ! / CHANT EN BRETON

Dalc'het e vez an atalieroù Kanal « Mison Kan ar Bobl ! », e sal an tanin (11 ru an Tanin), Pleuwigner ; etre 9e30 ha 3e30 g.m.

Les journées d'ateliers chant en breton ont lieu à la salle du Tanin (11 rue du Tanin) ; à Pluvigner ; entre 9h30 et 15h30.

**Priz / Tarif** : 35 € dre vugel (an 3 atalier) / par enfant (les 3 ateliers)

**Lakaat e anv ha gouiet hiroc'h /**

**Inscription et renseignements :**

02 97 78 41 40,

degemer@tidouaralre.com

WWW.TIDOUARALRE.COM

*Kred skeudennoù / Crédit images : www.freepik.com*

# DESKIT BREZHONEG !

Apprenez le breton !



## DES COURS POUR ADULTES SUR 5 COMMUNES DU PAYS D'AURAY !

Proposés par 2 associations :

-KERLENN STEN KIDNA

- AR VAMMENN

Pour tous niveaux, des débutants  
aux plus confirmés ;  
en journée et en soirée ;  
en ligne et en présentiel.

POUR EN SAVOIR PLUS,  
CONTACTEZ-NOUS !

02 97 78 41 40

[degemer@tidouaralre.com](mailto:degemer@tidouaralre.com)